

CANOUEEN NEVEZ

Var sujet ar votadeg a zo bet d'an eis a vis Maë (1898)

Var don : Ar Beleg yaouanc ag e vestres

1
 Canomp gant joa a lealdet,
 N'henor d'ar republikanet.
 O d'eus c'hoantet rei o moëziou,
 An Troadec Armez a Riou.

2
 An noblañç a gomze ker mad,
 Ma int bet diskaret a blad,
 An despèt do dispignou foll,
 Ar bobl n'int quet deut d'en em goll.

3
 Bre an Troadec a Champagny,
 Glevan e bet tom ar c'hoari.
 Mës ar muia moëziou n'eus bet,
 An Troadec or mignon karet.

4
 Champagny a n'eus madou bras,
 Dre ze kals arc'hant dispignas,
 Tud evitan dre oll vije,
 O rei arc'hant en follente.

5
 Tont da bea d'an dud boësson,
 Ken a vanke d'he o c'halon,
 O sonjal goëlloc'h goude ze,
 Gonit o moëziou digante.

6
 Mës ar proverb demp a lavar,
 Ar boësson a deu da ziskar,
 An dud nerzuss a muia kre,
 Pa ve efet gant follente,

7
 Dre ze-iniennou so bet.
 Malhevrusamant perisset,
 O vea roët d'he boësson,
 Ken e bet devet o c'halon.

8
 N'he qet dre voësson ma zud vad,
 Mar kerit n'em gompren er fad,
 E kleit choas un depute,
 Vit difen dec'h o liberte.

9
 Rag mad o pro o famillo,
 Vo gant ar rê o kouarn'het,
 Ma teuit da choas un den mad,
 Vo goëlloc'h dec'h vit eur c'hofad.

10
 An noblañç ag o c'honsortet,
 Goassa m'ho d'eus gallet d'eus gret,
 Evit essa rei da gredi.
 Vije mad ar fank da zibi.

11
 Mës an amzer so passeet,
 An drapo goënn vo ken goëlet,
 Rag ar paour vel ar pinvidic,
 Gri ra vevo ar (Republik).

12
 An aotrou Troadec so choaset,
 Kals muioc'h a voëziou n'eus bet,
 Nao c'hant nao moëz n'eus goneet,
 Ra vo eta dre oll meulet.

13
 Dre ze eta n'eus Champagny,
 Bet er vech man divar e fri,
 Dispign arc'hant koll e repos,
 Breman e kousko de a nos.

14
 Rag an dud breman so disket,
 A dre ze o d'eus bet goëlet,
 Ar fallenteo zo bet gret,
 D'hom zud kos pa oant var ar béd.

15
 Eur paour gante vije lac'het,
 Gant pemp goënnec vije paët,
 Oa ket brao beva n'amzer-ze,
 Goëlloc'h e demp om liberte.

16
 Goëhall oamp oll en esklavach,
 Om zud kos deoa vit partag,
 Bea nos de o labourat,
 O c'hoëzi an dour ag ar goad.

17
 An dekvet d'eus traou an douar,
 Oa d'an noblañç ep lakat mar,
 A ma larjent eur gir ep ken,
 Ar maro vite oa çerten.

18
 Ar veleyen an noblañçon,
 So bet kaos da gals trubuilhou,
 Dre ze ar bobl deut da skuisa,
 Deu da laret foëi d'he breman.

19
 Pe seurt lezennou demp ve gret,
 Ma vemp gant noblañç commandet,
 Privet vemp d'eus ar scolachou,
 Gessomp d'he or bugaligou.

20
 Privet vemp d'eus om liberte,
 Nemet brezel a beb koste.
 Ar vro vefe en tan en goad,
 Laket gand an dud execrabl.

21
 Goulennomp-ta va c'henvrois,
 Ma c'haï tud beal da Baris,
 Tud a zifenko demp or bro,
 Om liberte ag or mado.

22
 N'aotrou Troadec ouzoc'h er fad,
 A beb amzer n'eus bet brud vad,
 Gant lealdet o tifenko,
 D'eus lezennou fall noblañço.

23
 An diouvet goëch dean e c'he,
 Da vont da Baris depute,
 Zourcius e d'eus mad an oll,
 Miromp-ën ta ne c'haï da goll.

24
 Me o pëd oll citoyenet,
 Bezomp gouir republikanet.
 Troomp or c'heign d'an noblañço,
 So bet kaos da gals malheurio.

25
 Rag ar Republik bars en Franç.
 So goëlloc'h demp vit an noblañç,
 Evit difen all (Liberte,
 Egalite, Fraternelite).

26
 Canomp ar zon man Calonec,
 En enor d'an Aotrou Troadec,
 Criomp oll paour a pinvidic,
 Ra vevo pell ar (Republik).

FIN.

TAOC, bars Breis-Izel.

(Propriété de l'auteur).